

PEDADENN A-BERZH KAÑSELLEREZH URZH KOLIER AN ERMINIG 2024



D'ar 25 a viz Eost 2024

Ar blijadur am eus d'ho pediñ da lid Kolier an Erminig a vo dalc'het er bloaz-mañ e kêr Argantred-ar-Genkiz (nepell diouzh Gwitreg), d'ar Sadorn 5 a viz Here 2024, adalek 2 eur .

Kavit kevret ar bedadenn ofisiel savet gant servijoù ti-kêr Argantred-ar-Genkiz evit an degouezh meur-mañ. Ho trugarekaat a ran da lakaat hoc'h anv a-raok dibenn miz Gwengolo, kas a ran da soñj eo digor al lid d'an holl re a vo plijet dont da selaou hag enoriñ ar pevar den dibabet er bloaz-mañ.

Perak en Argantred-ar-Genkiz ? Cheñchet e vez lec'h bep bloaz gant Skolaj Urzh Kolier an Erminig. Tro departamant an Il-ha-Gwilen eo ar bloaz-mañ. Kinniget e oa bet un teuliad a-feson gant ar maer hag e guzul-kêr evit ma vefe aozet al lid en o c'humun. A benn bloaz e vo aozet e departamant Penn-ar-Bed. Lod ac'hanoc'h a soñjo sur mat eo pell marteze, met posupl e vo deoc'h da skouer profitañ eus an degouezh-mañ evit mont da weladenniñ kastell kaer Gwitreg diouzh ar mintin, Ne viot ket dipitet ! Degemer mat deoc'h !

Lena Louarn nevez anvet kañsellerez Urzh Kolier an Erminig

Da heul al lid e viot pedet holl d'ur banne digor-kalon lipous gant Jean-Noël Bevière maer ar gumun, hag e guzul-kêr.

